



Devezh-studi « Douar ha dour »

Galv predegennoù

Deiziad an devezh : Sadorn 5 a viz Ebrel 2014

Lec'h : lise labour-douar Kêrplouz – An Alre

Eurioù : 9 e – 17 e

Aozadur :

Ar c'hevredigezhioù Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna

Get izili a skolioù-meur Breizh ar C'hornôg, Roazhon 2, Skol-veur Kreisteiz Breizh

Kinnig :

Bro an Alre, ar vro vihanañ e Breizh (hrevez ar lezenn Voynet) get 606 km² a zouar, a zo dezhi neoazh oc'h penn 200 kilometrad a aodoù a-drugarez d'an inizi, ar Gerveur en o mesk. Se zo kaoz emañ bet soñjet en tem « douar ha dour », pe c'hoazh « douar ha mor », pa oa bet c'hoant derc'hel get ar lañs roet get ar c'holl kentañ, dalc'het ar zouar Alre e miz Here 2012 ar-dro labourioù Gwennole ar Menn.

Un tem pinvidik an hani eo, pandeogwir e c'hell bodiñ soñjoù ha labourioù liessort liammet doc'h an tiriadoù, hag estroc'h evit kani an Alre. Breizh a zo etre douar ha mor ; Breizh a zo douar ha dour, stêrioù ha mor, gwazhioù hag aberioù ; ken brudet an argoad koulz hag an arvor. Gwerso en em harp hec'h armerzh ar labour-douar koulz hag ar pesketa pe ar c'henwerzh ar vor. Don en em gav gwriennet levezon an dour hag an douar er brezhoneg, levezon an endro e spered ar yezh. Don en em gav gwriennet levezon an dour hag an douar er brezhoneg, levezon an endro e spered ar yezh.

Gellet a reer soñjal ivez e broioù ha pobloù minorelaet arall é vevañ etre douar ha dour. Studiadennoù ha soñjoù a-ziar ar broioù-se a c'hello marse teurel sklêrijenn ar draoù bevet pe klasket amañ e Breizh. Sikour a rahent enta ar moned ar-raok ar tachennoù zo.

Edan an tem-se e tegemero neuze ar c'homite skiantel kinnigoù é tenniñ doc'h :

- ar sokioyezhoniezh (rannyezhoniezh, fonologiezh ha razh) ;
- ar lennegezh (barzhed ag an inizi hag ag ar maezoù, awen oberennoù brezhonek ha c'hoazh) ;
- ar geografiezh (demografiezh, an armerzh hrevez skolioù ar vro...) ;
- an istoer (an eskemmoù, ar c'henwerzh etre an arvor hag an argoad ha c'hoazh) ;
- ar glad (savet ha naturel) hag an touristerezh ;
- ar bedagogiezh (kelenn ar liested, kelenn geografiezh Breizh h. c'h.) ;
- kement tachenn arall a vehe talvoudus plediñ arni en ur feson skiantel evit ar vro-mañ en deiz a hiriv.

Dedennet e vo el-se ur publik ledan, c'hoant getoñ klevet kaoz a bep sort traoù e brezhoneg. Priziet e vo neuze get ar c'homite skiantel ar mod da zegas gouiziegezh d'ar brasañ niver.

Siège social / Sez-kevredigezh

Mairie annexe de Brec'h - Penhoët - 8 rue Jean IV Duc de Bretagne - 56400 Brec'h / Adti-kêr Brec'h - Penc'hoed - 8 rue Yann IV Duk Breizh - 56400 Brec'h
Tél./Pgz 02 97 31 87 59 - Port./Hzg 06 58 97 15 93 - degemer@tidouaralre.com

Yezhoù :

Yezh pennañ an devezh studi e vo ar brezhoneg. Degemeret e vo neuze da gentañ ar c'hinnigoù kaset e brezhoneg ha graet e brezhoneg.

Jubennet e vo razh ar predegennoù e galleg (ha d'ar galleg hepken). Goulennet e vo neuze get razh ar re degemeret :

- derc'hel d'o c'hinnig ;
- komz ent naturel ha diwall a gomz re fonnapl.
- komz kentoc'h evit lenn : klask enta en em harpañ àr notennoù kentoc'h evit lenn un destenn beurskrivet ;
- kas en a-raok d'ar jubennerion, dre dTi Douar Alre (tidouaralre@gmail.com), kement testenn, kinnig luc'hvannoù (PowerPoint), listennad skouerioù ha c'hoazh emeur en soñj kinnig d'ar selaouerion ; kement-se da vihanañ dek devezh a-raok an devezh (ne vo ket skignet an dielloù resevet da zen erbet : sikour a raint prientiñ ar jubenniñ hepken) ;
- ma faot dezhe lenn un destenn e vo pouezusoc'h c'hoazh d'ar jubennerion labourat àrni a-raok an devezh-studi ; goulennet e vo neuze gete lenn difonn, chom a-sav dre bep div wezh.
- mar bez roet sifroù, o distag splann hag o adlâret mar bez afer.
- mar bez roet skouerioù gerioù pe troiennoù dibaot a-walc'h lakaet en ur geriadur bennak, roiñ ur listennad anezhe get an droidigezh bet dibabet e galleg
- pa vo kemeret ar gaoz (e brezhoneg) goude unan hag en neus komzet e brezhoneg ivez, gortoz un tammig : amzer d'ar jubennerion achuiñ ar frazenn a-raok.

Kinnigoù predegennoù (300 ger d'ar muiañ ha levlennadurezh verr) da gas da olietidouaralre@gmail.com **e-raok ar 05/01/2014**.

Embann :

Mennet eo an aozerion d'embann aktoù an devezh-studi e-korf ar blezad da heul. Roet e vo d'ar re degemeret reolennoù da aesaat ar labour embann ha graet e vo àr-dro get ar c'homite skiantel.

Komite aoziñ :

Daniel Carré, prezidant Kerlenn Sten Kidna ha bez-prezidant Ti Douar Alre
David ar Rouz ha Nely van Seventer, izili a Gerlenn Sten Kidna
Olivier Berson, animatour brezhonek Ti Douar Alre

Komite skiantel :

Daniel Carré, doktor àr ar brezhoneg, prezidant Kerlenn Sten Kidna ha bez-prezidant Ti Douar Alre
Daniel an Doujet, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Roazhon 2)
Erwan ar Pipeg, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Breizh ar C'hornôg)
David ar Rouz, doktor àr skiant an troiñ, PREFics (Skol-veur Kreisteiz Breizh)
Nely van Seventer, danvez doktor àr ar c'hembraeg (Skol-veur Aberystwyth)

Kalañder :

05/01/2014 : termen da gas ar c'hinnigoù

05/02/2014 : dibabet ar predegennoù

19/03/2014 : termen da gas ar skridoù ha razh an elfennoù a c'hello sikour get ar jubennerion

05/04/2014 : devezh-studi, roet e vo ar reolennoù evit an embann

05/10/2014 : termen da gas ar pennadoù-skrid

31/01/2015 : embannet an aktoù

Siège social / Sez-kevredigezh

Mairie annexe de Brec'h - Penhoët - 8 rue Jean IV Duc de Bretagne - 56400 Brec'h / Adti-kêr Brec'h - Penc'hoed - 8 ru Yann IV Duk Breizh - 56400 Brec'h
Tél./Pgz 02 97 31 87 59 - Port./Hzg 06 58 97 15 93 - degemer@tidouaralre.com